



2020



## **Kazetenniñ : Ur sizhunvezh evit ober anaoudegezh gant bed ar radio**

Labourat a raimp a-hed ar sizhun evit ober anaoudegezh gant bed ar radio ha sevel abadennoù.

Pleustrek vo ar staj penn-da-benn.

Ret eo d'an dud a lak o anv bezañ en o aes gant an urzhiataerioù.

Mont a raio ar skipailh war an dachenn evit atersiñ tud.

1 devezh labour er radio a vo d'ar gwener (gweladenniñ Radio Kerne + Labourat en studioioù)

An danvez fardet gant ar stajidi a vo skignet da heul ar staj.

Preparet vo ur rentañ-kont dre ar son db ar staj evit skignañ anezhañ d'ar gwener da noz e KEAV.

### **- Tañva teknikoù ar radio :**

Komz ouzh ar mikro, prientiñ ha kas un atersadenn da benn, skeudenniñ ur reportaj gant ar son, sevel kronikoù, sevel blenier un abadenn...(neudenn an abadennoù)

### **- Ober anaoudegezh gant ar binviji teknik : son-enroller, meziantoù frammañ...**

Ma 'z eus kinnigoù kelskrid gant lod (tud eus o familh pe traoù all) gwell a-se.

**Ne vo ket kemeret ouzhpenn 10 den er rummad-se. Gwelloc'h eo d'ar stajidi bezañ en o aez gant an urzhiataerioù.**

	Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou er radio	Gwener er radio
Mintin	Kinnig ar radio, an teknikoù, program ar sizhun  Strolladoù labour  Dibab atersadennoù, sujedoù kronikoù, kemer emgavioù	War an dachenn	War an dachenn	War an dachenn	Frammañ pennadoù-komz hag abadennoù + abadenn rentañ-kont fin ar staj
Goude Merenn	Teknik enrollañ  Ober atersadennoù  Teknik meziant frammañ	Frammañ ar pennadoù-komz  Poelladenn : Sevel ur blenier	Frammañ ar pennadoù-komz  Skrivañ kronikoù	Gweladenn ar radio  Frammañ pennadoù- komz hag abadennoù	Frammañ pennadoù-komz hag abadennoù + abadenn rentañ-kont fin ar staj

**EVEZHIADENN** : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.